

Da Fidel

Deomp 'ta,
Diouganer entanet tarzh-an-deiz,
Dre c'harhentoù kuzh kamm-digamm,
Da zieubiñ ar vro c'hlas a garez.

Deomp 'ta,
Da dalvout meur a wall,
E-leizh a stered dispac'h war hon tal,
O touiñ bezañ trec'h pe mervel.

Pa glever an temm kentañ ha pa sav ar vro,
Evel ur plac'h dihunet dre spont,
Eno ez kichen e vezimp, kadourien sioul,
Eno e vezimp.

Pa'z embann da vouezh d'ar peder avel
An adreoliañ douaroù,
Ar reizhder, ar bara hag ar frankiz,
Eno e vezimp da heklev d'az komzoù,
Eno e vezimp.

En deiz ma vo gloazet al loen gouez en e gostez
Dre hon c'hoant dieubiñ,
Eno e vezimp ganit, lorc'h ennout ouzh e glevout,
Eno e vezimp.

N'a ket da grediñ hon lakont da grenañ,
Armet gant profoù ha medalennoù,
Bazh, fuzuilh ha tennoù a fell deomp kaout,
Netra ken.

Ma vezomp diskaret gant o fuzuilhoù,
Ne hetomp kaout nemet daeroù Kuba
Da lienañ ar gadourien
Skubet gant red an istor,
Netra ken.

Che Guevara